



Ar c'hazhig bihan rouz - Le tout petit chat roux

Suzanne MONTFORT – Pont Rod - Peurid ar Roc'h - Miz Here 1978 (Pont Rod – Pommerit-Jaudy – Octobre 1978)

Me am eus du-mañ ur c'hazhig bihan rouz
Hag a ra din-me kalz a drouz

Ha me a raio gant e benn
Dampe ne vijen, vijen vakon
Kokardenn joa, gwigourat a ra
Ha me a raio gant e benn
Ur pod-houarn d'ober soubenn

Ha me a ray gant e daoulagad
Ul lunedoù da berson Prad

Ha me a ray gant e divskouarn
Div gokenn da gas adverteñn

Ha me a raio gant e daou droad a-raok
Ur vazh yod hag ur vazh ribot

Ha me a raio gant e gein
Ur c'harr bihan da charreat mein

Ha me a raio gant e gof
Ul louar da vouetañ moc'h

Ha me a ray gant e vouelloù
Ur sac'had mat a rubanoù

Ha me a ray gant e daou droad a-dreñv
Ur flac'hioù da berson Pontreñv

Ha me a raio gant e lost
Ur blumachenn da paotr ar post

Ha me a ray gant toull e reor
Un dabatierenn d'am mamm-gaer

*J'ai chez moi un tout petit chat roux
Et je trouve qu'il fait beaucoup de bruit.*

*Et je ferai avec sa tête
Dampe ne vijen, vijen vakon
Cocarde et joie, il grince,
Et je ferai avec sa tête
Une marmite pour faire de la soupe.*

*Et je ferai avec ses deux yeux
Une paire de lunettes pour le curé de Prat.*

*Et je ferai avec ses deux oreilles
Deux coquilles pour apporter le goûter.*

*Et je ferai avec ses deux pattes de devant
Un bâton à bouillie et un bâton à baratter.*

*Et je ferai avec son dos
Une petite charrette pour charroyer des pierres.*

*Et je ferai avec son ventre
Une auge pour nourrir les cochons.*

*Et je ferai avec ses boyaux
Un bon sac de rubans.*

*Et je ferai avec ses deux pattes arrière
Des béquilles pour le curé de Pontreñv.*

*Et je ferai avec sa queue
Une plume pour le postier.*

*Et je ferai avec son trou du cul
Une tabatière pour ma belle mère !*

Ar c'hazhig bihan rouz - Le tout petit chat roux (2)

Louise CONNAN - Rugwazvin – Prad – 1979

Me am eus ur c'hazhig bihan rouz
Hag a ra du-mañ kalz a drouz

Me a raio ivez gant e benn
Vijen-e-vajon, kokardenn joa, gwigourat a ra
Me a raio ivez gant e benn
Ur pod-houarn d'ober soubenn

Me a raio ivez gant e divskouarn
Ur goloar d'am fod-houarn

Me a raio ivez gant e dent
Ur rastell da rastellat mein

Me a raio ivez gant e fri
Ur skubelenn da skubañ an ti

*J'ai un tout petit chat roux
Et il fait beaucoup de bruit chez moi.*

*Je ferai aussi avec sa tête
Vijen-e-vajon, cocarde et joie, il grince,
Et je ferai avec sa tête
Une marmite pour faire de la soupe.*

*Je ferai aussi avec ses deux oreilles
Un couvercle pour ma marmite.*

*Je ferai aussi avec ses dents
Un râteau pour ratisser les cailloux.*

*Je ferai aussi avec son nez
Un balai pour balayer la maison.*